

Milin (Kastell-Paol 822 – Enez Vaz 1895)
Modernnaet eo bet an daore-skriva.

Maro ha kañv gwreg al leon

Gwreg al Leon a varvas ;
Evid an oll leoned ne oe ket eur holl braz.
Pep-unan, ‘velato, dur war e zaoulagad,
Hervez ma oa ar hiz, a redas mintin mad
Da gaoud ar Roue Leon gourvezet en e graou,
Da lavared dezañ eur gerig mad pe zaou,
Eur ger mad a ra vad da gelved e glahar,
Pqa zao euz ar galon d’ar genou, e lavar.
 Al leon a laka embann,
 E pep bro hag e peb lann,
 ‘Vije beziet ar Rouanez
 El leh-mañ-leh, en deiz-mañ-deiz,
 ‘Vije eno tud euz e berz
 Da renka ar stal hag ar hañv.
Bez’ e hellit kredi e oe pep unan skañv
 Da zond en deiz-se d’ar gouel berz.
Evel-se e c’hoarvez ; d’ar hañv ‘vezer pedet,
Evid degas enor d’ar re veo ‘zo er bed.
Evid ar re varo, ar pedennou ‘larer
A vez diêz da baka, ker berr o divesker.
An intañv ivineg a laoske hirvoudou,
 Ken a grene ar mogerioù ;
 Hga oh e gleved o yudal,
 Ar fistoulerien, koz chatal,
 Oh orbida, stouet o fenn,
 A yud ivez leiz o horzenn.
 Ar re-mañ ‘oa ar re a lez
 A zo ganto pep seurt arwez ;
 Peb eil e c’hoarzont, e ouelont,
 Hag a netra van ne reont.
 Gand ma vint mad gand ar Roue,
 Forz ebed ne reont a Zoue.
 Ganet a ouenn ar varmouzien,
 Pennou avel, bombezerien,
 ‘Hed o livenn ‘deus kostou bleiz,
 Rag trei a reont a-zehou, a-gleiz,
 Evel ma ra eur vargodenn
 Pa vez sahet war he neudenn.
 Oh o gweled, ‘vez lavaret
Ez int kant korv war ahel, o trei gand eur spered
Evid dond d’am marvaill : ar Haro hebmuiken,
E-touez al loened all, ne ouelas beradenn.
 Penaos en-divije gouelet ?

Gor e ene 'oa kiskarget¹ :
Ar Rouanez he-doa gwechall
Debret e wreg, krohenn hag all,
Hag ar mabig goude ar vamm.

Pa oa bremañ maro n'oa leh da ouela tamm.
Ne reas zoken an neuz 'vel en deiz 'oa lirin.
D'al Leon 'oe lavaret 'oa gwelet o c'hoarzin.
Pa vez eet droug ar Roue, dreist-oll ar Roue Leon,
An droug-se a zo hakr,
Eme 'r fur Salomon.

Ar Haro ne oa boaz da lenn ar skritur sakr.
Al Leon a lavaras : « Tar fall euz o hoajou ;
Te 'hoarz, heb ober van euz on huanadou.
War da grohenn iskiz ne lakin va hraban,
En aon rag da stlabez : ne dalvez ket ar boan ;
C'hwi avad, bleizi kriz, deut amañ hag afo
Dispennit, dre 'n hanter, dom c'hoarzer ar Haro. »
Hmañ neuze lavar : « Klevit, m'ho ped, aotrou,
Setu deuet an amzer da zeha ho taelou.

Arabad eo ho-pe anken !

N'eus pell em-beus gwelet ho kwreg, hoh hanterenn ;
War eur gwele bleun kaer, laouen 'oa azezet ;

Raktal 'm-beus he anavezet.

Mignon, emezi din, pa' z on eet d'an neñvou,
Ez eo arabad dit warnon skuilla daelou.
E-kreiz ar baradoz me 'zo euruz meurbed,
O tiviz gand ar re 'zo eveldon salvet.
Laosk ar Roue da ouela 'pad eur pennadig c'hoaz,
E weled ankeniet a ra din eur joa vraz. »
P'oe klevet ar helou gand an oll loened mud
Diohtu, a-bouez o fenn, e lavarjont : « burzud ! »

E-leh beza lazet

Ar Haro 'oe meulet.

Gand ar Roue e koanias

Ha, mar deo gwir, 'lavarer c'hoaz,

Goude e goan en-doe ar groaz.

*

Setu eur gentell vad deoh-hu, c'hwi tud a lez,
Roet amañ gand eul loen gouez !
Dalhit eun tamm bevin atao ouz hoh higenn,
Mar deo flour ho kevier, mar deo gouez ho livenn,
Ar Roue, ar re vraz,
N'o-devo ket pell ouzoh-hu kalz a gas.
O droug a ya gand ar maged,
Strinket a-du oh o genou ;
Gand ober eun tamm orbidou,
'Vezer abred o mignoned,

¹ kiskarget : ?

Hg ez a an higenn, dre greiz o gouzougenn,
Ken druz c'hoaz ma lipont tro-war-dro o mourrou.